

249

(f. 77)

Mestrez ar meliner.

De Bonjour deoc'h va dous Loïza
 doc'h ho kalon penoz a ra.

— Ma halonnik a zo seder
 ag o hini va chervicher?

— eman ar breud dre ar chanton
 O c'heus chenchet a opinion.

O c'heus chenchet a gvir amour
 Evid komeret eur strinker dour.

— Na me ne meus ket promettit
 Da velliner iaouank e bed

Nemed da henond Fanch ar hamon
 A zo e chom en melin Sâdon.

Me meus eur verzen en penn va zi
 A loj al louarn dindani
 a vijou daou a vijou tri.

Neb en deus ier lakeet en ti
 espicial ar prolezi

espicial ar merhet koant
 Raq al louarn a zo friand

— Ed e va ierig er verzen
 Nom ked penos mond de disken.

— Tollid eun dornad kerc'h dez
 A galseti piti, piti.

7

Mari Bozeg, 18 fev. 1851.